


Mark an Aocher

Un huñvre dreistordinal en deus Mark Dufeil. Abaoe ur pennad amzer eo deuet da vezañ ouzhpenn un huñvre : boulc'het gantañ da vat raktres *An Aocher*. Beajiñ gant ur vag savet a-ratozh evit an nammidi, a borzh da borzh, war aodoù Europa ha norzh Afrika, evit ober anaoudegezh gant an dud eno, o yezhoù, o sevenadur.



Un tres a ziskouez ar stumm a vo gant *An Aocher*.

Framm koad ar vag a weler amañ, e stal sevel-bigi Yves Tanguy e Douarnenez. Dirak emañ Mark Dufeil. Adrekañ, a-gleiz da zehou, daou vicherour hag o rener Yves Tanguy, ha treser ar vag, Marcel Stagnol. (sk. Marie-Line Quéau)

Sot eo Mark Dufeil gant ar mor, ar bigi kozh, abaoe pell zo. E-kerzh fest ar bigi kozh e porzh Rozmeur e Douarnenez, e 1988, en doa bet ur gwallzarvoud grevus. Hiziv e kendalc'h gant e hent en e gador-dredan, ken sot gant ar bigi hag ar mor hag a-raok, hag o chom e Douarnenez. E c'hoant bras-meurbet da vont war vor a vag e youl hag e nerzh da gas da benn huñvre *An Aocher*. Un huñvre a bado hag a gaso anezhañ pell. Div veaj a vo. War aodoù hanternoz Europa da gentañ, etre Douarnenez ha Bergen e Norvegia. E-kerzh an eil beaj e aocho war-du ar su, betek Maouritania, hag ar reter. Eus Douarnenez bepred, oc'h ober tro ar Mor Kreizdouar hag ar Mor Du. Mont a raio en douaroù ivez, war ar stêrioù, betek Kiev da skouer.

DOUJAÑ AR MOR, AN NATUR

Ledan ha liesseurt eo ar mennozhioù a vag raktres Mark Dufeil. Gwarez an endro zo unan anezho. "Ur vag koad e vo ar c'hatamarian, savet gant koad eus ar vro" eme Vark. "Ur greizenn purañ dour a vo war vourzh. Emren e vo e-keñver tredan gant panneloù-heol, troellrodoù dre zour, rodou-avel". Ur batiri a vo ivez evit kargañ tredan war ar c'hae diouzh ret. Boulc'het

e oa bet al labour da sevel ar vag en hañv tremenet, e stal-labour Yves Tanguy e Douarnenez. Gant Marcel Stagnol eo bet treset, hag emañ an ijinour Pierre-Yves Glorennec oc'h aozañ ur meziant evit ma c'hellfe un den nammet "pe tud n'int ket martoloded" sturiant ar vag da vat. "Ur marc'had a c'hellfe bezañ evit-se. Ur benveg nevez e vo, evit an holl". Anat deoc'h e vo savet ar vag evit reiñ an tu d'unan bennak mont-ha-dont aes en ur gadoruilh. "Al levier e vin" eme Vark. "Ar pep pouezusañ eo e vefe stabil-kenañ : plaen e rank chom ar vag ar muiañ ar gwellañ", kuit da gaout ur gwallzarvoud war vourzh. Dibab sevel ur c'hatamarian daou gouc'h zo bet graet neuze. Setu ma teu war wel unan eus palioù all *An Aocher*.

DOUJAÑ AN NAMMIDI

"Gwelet petra a vez bet kempennet, pe get, er porzh-mañ-porzh evit degemer nammidi". Dastum ar mennozhioù, rannañ anezho, ha kinnig e desteni d'an dud. "Pediñ a rin nammidi ar c'horn-bro da welet petra a c'heller ober gant ar vag, ha marteze, rannañ ganto ar blijadur da vezañ war vor". Ur skoazeller pe ur skoazellerez a-vicher a vo gopret gantañ evit ober war e dro. Meur a hini pa lavarar mat, rak ingal e cheñcho, a-hed e aocherezh.

"Ganto e vin sikouret bep taol d'ober gwelloc'h anaoudegezh gant ar broioù" eme Vark, ha gant ar yezhoù enno. Sed aze difluket an trede danvez...

DOUJAÑ AR SEVENADURIOÙ

Sot eo Mark Dufeil gant ar yezhoù ivez. Ouzhpenn ar gallaoueg bet desket gant e dud-kozh e Bro Sant-Maloù, ar brezhoneg, ar galleg, ar saozneg, en deus desket tammoù alamaneg, italianeg, portugaleg, ha berbereg c'hoazh. Kalz re all a vo ! E pep porzh e komzo Mark diwar-benn perzhioù dibar Breizh, e-keñver sevenadur, yezh, sonerezh hag all. E lec'hienn Internet *An Aocher* e roio keloù bemdez eus e droioù-kaer.

KAS AN TRAOÙ DA BENN

O labourat emañ Mark diehan neuze evit kas *An Aocher* da benn. Klask war-lerc'h skoaziadoù, aozañ doareoù da genlabourat gant kevredigezhioù, embregerezhioù, skolioù, tud a bep seurt... Bodañ ar muiañ ar gwellañ a dud a fell dezhañ ober. "Ur vicher eo da vat !" emezañ en ur vousec'hoarzhin. 500 000 € e vefe ret kaout evit kas pep tra da benn emezañ. Spi en deus da vorañ ar vag a-benn hañv 2012. Avel vat d'*An Aocher* !

M.L.